

# Soniou koant an amzer koz

*coll. J. J. Stalip*



## SON AN IVINEN

*(Goulennet da brenan)*

Ar c'houec'hved eus a viz goueren,  
Mil eiz kant tri ha daou ugent,  
Eur c'holl bras a zo arruet,  
— Gouelan a ran ouz hen laret, —  
Eun tiad bras hag enorus  
'Zo laket 'n eur stad truezus.

Aboue tri c'hant vla, marteze,  
Holl yer ar bourk, a re da re,  
A glude en ivinen vras,  
'Us d'ar véred ha tost d'ar groaz ;  
Biskoaz n'o devoa meritet  
Bean eus ar ouenn digludet.

Kerkent ha ma savas ar vrud  
E vije diskaret ar c'hlud,  
En em dastumas ar c'higi,  
Ar yer goz hag ar polizi ;  
Gant glac'har bras ha poan-spered,  
E tiredjont da 'n em glevet.

Petra d'ober ? Dolac'h monet

Alies am eus dihunet  
Ar bourkiz dies re gouasket.

Diwar ma brank, me 'm eus gwelet,  
Kalz a everien kaledet,  
O ruilhal, o tirezoni,  
En em gannan, o chikani ;  
Furoc'h evito ve 'r loened,  
Rak, d'ar c'houlz-ze, vijent kousket.

Gwelet am eus, dindan ma brank,  
A-hed an noz, pôtrede yaouank ;  
An eil d'egile 'n eus kontet,  
Kojo bihan, konchou kuzet,  
Mes marteze 'vefent nec'het,  
Mar beint kontet d'o mestrezed.

Diwar ma brank, me 'm eus gwelet,  
Niver bras a gomerezed,  
A di da di, a dor da dor,  
Henvel ouz gwraze a enor,  
Ha goude bean klakennet,  
Eur « borsion » 'vije lipet

Gwelet 'm eus c'hoaz, diwar ma brank,  
Eur wech bennak, pôtrede yaouank,  
O laerez keuneud hag ou,

— Petra, turzunel yaouank, a dourmant da galon ?  
— Kollet am éus, emezi, ma fidelan mignon ;  
Maa ne deu ar chaseour da ober d'in mervel,  
Me varvo gant ar glac'har, na d'am mignon fidel.

Me 'm eus gwelet o vervel an durzunel yaouank ;  
Karget he deus ma c'halon a boan hag a dourmant !  
'N he huanad diwean he deuz c'hoaz lavaret :  
— Ah ! ma mignon fidel ! — kerkent eo tremenet.

Setu aman ar kreuveu eus ar gwir garante,  
A dleer da gonservi an eil 'vit egile,  
Nag etre daou zen yaouank hag a ve unanet,  
Dle mervel gant ar glac'har, ma veint dispartiet.

Keit ma vin war an douar me am o kalonad,  
Ma ne viran da gomzou dirak ma daoulagad :  
— Me na varvin ket kontant, ma na varvan fidel —  
Birviken na ankouain maro an durzunel.

## SON AR C'HAFE

*(Goulennet da brenan)*

Ar yer goz hag ar polizi ;  
Gant glac'har bras ha poan-spered,  
E tiredjont da 'n em glevet.

Petra d'ober ? Pelec'h monet,  
Mar ve 'n ivinen diskaret ?  
A rum da rum, a ras da ras,  
E kludemp en ivinen vras,  
Mar ve sellet ouz al lezen,  
Aboue pell zo ni zo perc'hen.

Hag e kontfen parzek real,  
Evit zavel d'imp eur o'hlud-all,  
Biken ne vemp ken kaer kludet  
'Vel en ivinen vinniget ;  
Bihan ha bras, koz ha yaouank,  
Pep-hini an evoa e vrak.

O ya ! kentoc'h, 'me ar c'hog ru,  
E chancho an avel a du,  
'Vit ne c'houzanyfen me biken,  
E ve diskaret ma gween !  
Rak me anve al lezenno,  
Kenkoulz ha mab dimeus ar vro.

Eur fallagriez a ve groet,  
Mar ve 'n ivinen diskaret ;  
Ar bed, siouaz, a zo karget  
A dud fall hag interestet ;  
Hag e ouefen koll ma c'hriben,  
Me a renko heuilh al lezen !

Mont ra ar c'hog, a gammed vad,  
Da c'houl ali an advokad ;  
Mes warben ec'h eo distroet,  
An ivinen zo diskaret,  
Ha setu ar c'hog daoubennet,  
Hag e holl diad glac'haret.

Siouaz, ivinen vinniget !  
Pelloc'h ennout ne gludfomp ket,  
Breman hon bue 'zo gwestlet  
Ha d'al lern briz ha d'ar martred,  
Te, ivinen baour, 'zo troc'het,  
Ha ni, marteze, vo muntret.

Kludet war da vrakou uhel,  
Goude strakal ma dioueskel,  
Ar kourk holl a-bez a zone,  
Pa losken ma mouez da vale ;

Gwelet 'm eus c'hoaz, diwar ma brank,  
Eur wech bennak, pôtrede yaouank,  
O laerez keuneud hag uo,  
Evit ober fritadenno,  
'N o flas, e fontfen gant ar vez...  
Koachet, koachet 'ta, pôtrede kez !

Ma flijadur a zo achu !  
Pelloc'h tol kaer ne welin-mu ;  
Ma c'halonig a zo mantret,  
Pa zonjan 'n ivinen troc'het,  
Mervel a ran gant an anken,  
Kenavo evit birviken !..

Gant ar c'hog ru hag ar c'hog gwenn,  
Eo bet savet ar ganaouen,  
Gant ar yar goz eo bet skrivet,  
Gant ar polizi vo kanet,  
Hag evelse e vo miret,  
Sonj an ivinen vinniget.

---

---

## AN DURZUNEL

---

Kalz amzer am eus kollet o furchal ar c'hoajou,  
Kas tapout an durzunel kousket war ar brankou,  
Dêvet am eus eun amors ha tennet am eus fall.  
Tec'het eo an durzunel ha nijet 'n eur c'hoat-all.

Diouz an noz hag ar mintiz e klevan lapoused,  
O kanan, o fredoni, e beg ar gwe pignet,  
Mes nan eus hini ane hag a bik ma c'halon,  
Evel mouez an durzunel o ouelan d'he mignon :

— « N'eus na zouten, na remed, na konsolasion,  
Ve kab da dont da galmi t'armanchou ma c'halon,  
Trezet oun gant ar glac'har, mont a ran da vervel ;  
Mes ne varvin ket kontant, ma ne varvan fidel.

Ma c'halon 'zo 'tizec'hi frailhet gant ar glac'har,  
Evel eun intanvez paour, kollet ganti he far, »  
— Nan, nan eus hini ane hag a bik ma c'halon,  
Evel mouez an durzunel o ouelan d'he mignon.

## SON AR C'HAFE

(Goulennet da brenan)

N'heller ket bevan hep kafe, chetu,  
N'heller ket bevan hep kafe,  
Kemeret kafe bep beure.

DISKAN

*L'itou, laitou, laita,  
O laitou, laitou lanla !*

Warlerc'h kafe, netra suroc'h, chetu,  
Ho spered a vo digoroc'h.

Goude ho meren, da greizte, chetu,  
C'houi gomzo gwell 'vit doktored.

D'an noz, pa ho pezo koaniet, chetu,  
Kafe 'darre, hep aon ebet.

Reit bara sec'h d'ho-pugale, chetu,  
Komer, mes lipet c'houi kafe !

D'ar zul, kent mont d'an oferen, chetu,  
Kemeret kafe gant koaven.

Kafe a ro nerz d'ar galon, chetu,  
Hag a dom an devosion.

'Vit kanan meulodi Dope, chetu,  
N'eus netra gwell evit kafe.

Nan, er bed-man, n'eus netra gwell, chetu ;  
Bout hep kafe, kentoc'h mervel !

Piou 'n eus savet ar ganaouen, chetu,  
Eur paour kez dall, eun den bleo gwenn.

Mar n'he c'havet na kaer na brao, chetu,  
Laret chaous d'an hini he zao.

Mar he c'havet ha brao ha kaer, chetu,  
Reit d'in eur wech kafe kommer.